

Meurriad

#37

BANNOÙ-TRESE
HA C'HOARIOÙ !



KAZETENN VIZIEK - GENVER 2006 - 5 €

• NICOBY • DEPTIERROTS • AURELIENH • LOL • FOURNIER • BALAN •
MORINIÈRE/CHOUIN/TAREK • ROBET • MORVAN • SANGLA • LE DORVEN

BALAN 05

BLOAVEZH MAT D'AN HOLL !!!


2006

Bloavezh mat

➔ Diazezañ hon darempredoù war an doujañs,
 ar sklaerder, an anaoudegezh
 Bezañ en ho kichen da vareoù mat ar vuhez evel d'ar re all
 Setu petra eo hor gouestl evit gounid, da vat,
 ho fiziñs hag ho fealded.



Un darempred a bad, ha kemmet eo ar vuhez



BELEROPHON

M. DEPIERROIS



SKAÑV E OA VA C'HALON, AR MINTINVEZH-SE.

UR MINTINVEZH MA SEBLANT DEOCH BEZAÑ
DISAMMET GANT GREVUSTED AR MARE.

MA. NE OA KET UR VUHEZ DIROLL.
MET BEZ E C'HELLAN LARET
EN EM SANTEN MAT.

YA. SE EO. SKAÑV
A GORF HA A SPERED.



HAG, A-GREIZ-TOU, E WELIS ANEZHAÑ.
O YA ! MORSE NE C'HELLIN DISOÑJAL
AN DRA-SE... AZE E OA...
E KORN AR STRAED, DRES.



EDO O C'HORTOZ.



HA TOSTAAT A RIS, MA-UNAN
E-TOUESK AR VALEERIEIN. O
KAVOUT ISKIS AR WELEDIGEZH-
SE. AR PEZH A C'HOARVEZAS A
ECHUAS DA SEBEZAÑ A'CHANON.



AZE EMAOUT,
'BENN AR FIN.
HAST AFO ! DEUS
WAR VA C'HEIN.






KOMZOU'AOUANK

Guy Laine

dañserez e Kelc'h Keltiek Douarnenez



Anv :
Sergent
Anv-bihan :
Guylaine
Oad : 19 vloaz
Al liv a blij dezhi :
an oranjez
Ar vleunienn :
ar velionenn
Al loen :
ar rannig
Ar vro : Iwerzhon
Ar ganaouenn :
"On s'emmène"
(La Rue Ketanou)
Ar film :
Charlie et la
chocolaterie
Al levr :
La fée Carabine
(Pennac)
Ar sport :
euh... an dañs

Guylaine, abaoe peur oc'h en em lakaet da zañsal ?

Abaoe on bihan tout, gant va zud er festoù-noz ha war-lerc'h e kelc'h keltiek Douarnenez, da 8 vloaz.

Petra eo an dañs a blij deoc'h ar muiañ ?

Ar gavotenn eo.

Perak oc'h enskrivet en ur c'helc'h keltiek ?

Er penn-kentañ e oa evit deskiñ muioc'h a zañsoù met bremañ eo ivez peogwir e vezan staget, ouzh an dud, abalamour d'an aergelc'h, hag ivez abalamour d'an abadennoù nevez a vez graet eno.

Petra a gavit eno ha ne gavit ket er festoù-noz ?

Daou dra disheñvel eo. Da gentañ e vez dañset muioc'h a zañsoù disheñ-

vel. Gwelet e vez an dañs en un doare all, spisoc'h un tamm marteze. Desket e vez traoù : eus pelec'h e teu dañs-mañ dañs, penaos eo deuet betek ennomp... un tammig e pep lec'h er bed, evel e Norfolk da skouer. Seurt darvoudoù a vez gwelet en abadenn. Setu an istor kontet berr-ber, da lavaret eo e vez gwelet penaos e tremen an traoù e Douarnenez, ar vuhez hep ar wazed, ar vartoloded war vor, hag ar vartoloded e Norfolk. Se eo, dreist-holl, a lak da gomz eus ar c'helc'h, hiziv an deiz, dre ma kinnig ur meskaj etre ar gwerz hag ar jazz, etre dansoù Breizh, hag ar charleston, a veze dañset d'ar mare-se er Stadoù-Unanet, evel-just.

Klevet e vez kalz kaoz eus "Korrigeed Is". Perak ?

Ya, dre m'hon eus savet un abadenn nevez, ganti un doare nevez da implij an dañs e-keñver abadennoù "boas" ar c'helc'hioù. "Je vous dirai..." eo anvet, hag a dremen da vare ar brezel 14. Un istor gwir eo, hini ur martolod eus Douarnenez, galvet da vont da gerc'hat ed e Aostralia evit an arme. E-kerzh ar veaj e touraront

Desket

e vez kalz

traoù : eus
pelec'h e teu
dañs-mañ
dañs,
penaos eo deuet
betek ennomp...

un tammig e pep lec'h er bed, evel e Norfolk da skouer. Seurt darvoudoù a vez gwelet en abadenn. Setu an istor kontet berr-ber, da lavaret eo e vez gwelet penaos e tremen an traoù e Douarnenez, ar vuhez hep ar wazed, ar vartoloded war vor, hag ar vartoloded e Norfolk. Se eo, dreist-holl, a lak da gomz eus ar c'helc'h, hiziv an deiz, dre ma kinnig ur meskaj etre ar gwerz hag ar jazz, etre dansoù Breizh, hag ar charleston, a veze dañset d'ar mare-se er Stadoù-Unanet, evel-just.

Da betra 'servij ur c'helc'h ? Derc'hel bev ar pezh a zo bet pe krouiñ traoù nevez ?

D'an daou : ar sevenadur n'eo ket un dra difiñv. Setu, neuze, perzh ur c'helc'h n'eo ket nemet derc'hel bev an hengoun, met muioc'h c'hoazh... Dav eo kenderc'hel gantañ, ha lakaat an traoù da vont war-raok.

Peseurt soñj ho peus war dibunadegoù ar c'helc'hioù e-pad an hañv ?

N'eo ket ar pezh a blij din ar muiañ. Bremañ e vez graet traoù un tammig disheñvel ganeomp, met n'eo ket displijus diskouez ul lodenn deus hor sevenadur d'an dud.

Ha war dilennadegoù rouanez pe rouanez ?

N'on ket gwall zedennet gant an dra-se. Ne yin ket da glask bezañ dilennet, met ma ra blijadur da lod, ne zirenk ket ac'hanon.

Liammoù start a zo etre bed an dañsoù hag hini ar yezh ? Evidoc'h ? Evit ar re a zo tro-dro deoc'h ?

Evidon ya, evel-just, ul lodenn deus hor sevenadur eo an daou. Met evit ar re all n'eo ket atav anat. Daoust ma ne welont ket atav al liamm etre dañs ha yezh, ne soñjont ket eo didalvez ar brezhoneg e Breizh.

E-pad pegeit emaoch e soñj kenderc'hel gant an dañs ? Evit ober petra ?

N' em em c'houlennan ket seurt traoù. 'Keit ha ma plijo din!

Peseurt kelc'h all a zo tost d'ho ralon, evit ar pezh a reont ?

N'ouzon ket re, hini Kemperle marteze, a lak un tammig a levezon rock gant troioù daou ha daou, buan, ha resis...



KORNALLENNERIEN Ar servij sivil ?

Muic'h-mui e vez kaoz anezhañ... Talvoudus e vefe evit lakaat pe adlakaat ar re yaouank e-kreiz ar gevredigezh. Un doare da reiñ dezho da gemer perzh e mont en-dro o bed ha da sikour. Un doare all da virout ne begfe ket mui an tan e kirri ar bannlevioù.

Soñjoù lod ac'hanoc'h...

... Poellekoc'h e vefe kas da benn seurt servij sivil eget ar JAPD hag n'eo diazezet nemet war an arme. Ober traoù sakialoc'h a c'helle ober vad d'ar re a zo lakaet a-gostez, evel ar re gozh... War brevesat ez a ar gevredigezh. Padal eo mat der'hel d'ur servij publik. Hag ar re yaouank-mañ a sikourte ar re all, en ur mod...

Emmanuel, 17 vloaz

Das lakaat ar labour hag ar mouded war an memes renk evit ar servij sivil evit an traoù all... Forzh penaos, na c'hell ket ar vro e-lec'h ar re yaouank, reñ muic'h-mui a winoù da labourer. Ha d'ar re rediañ anezhañ da gemer perzh ar servij sivil. Ha hin a rankfe chom digas da zibab beset amzer en deus c'hoant reiñ d'ar gevredigezh.

Maela, 16 vloaz

Bep tro ma vez rediet an dud e sav kudennoù. Ganto e vez ar santimant bezañ bet kollet o amzer. Lakaomp ar servij sivil e pleustr met ket en un doare ret. Rediañ a dalvezfe lazhañ ar pal orin...

Kaou, 17 vloaz

Mat e vefe lakaat ar servij sivil e plas oa ne vefe evit lakaat an dud da zambardañ, kendervez, ha mirout ouz ar rakvadennoù. Ar re-mañ a vez zveat aler a-raok. Ne gejjont ket gant tud ar gevredigezh. E vefe reiñ an taron sikour dezho evit ma c'hellent an ar yaouank ar ar bed hag ar an dud a zo tro ar gozh. En mar-mañ ne vez ket travalc'h a sikour etre an dud ha chom a ra pep hui en e gorn.

Maodann, 16 vloaz

Mont war ul lec'h e-pad ur-miz a vefe ur dra vat. Hiziv an deiz n'hon eus mennozh ebet eus ar mod ma tremen an traoù er bannlevioù. Un digarez e vefe deomp ober traoù gant hon daouarn. Gwelloc'h e vefe ma trow die ket ar gwir da zibab al lec'h ma labourer. E mod all e vefe lezhañ ar re gozh den ebet e'hoant mont ennan ha dilzeat e vefe an dud eno.

Klervi, 16 vloaz

Gwelloc'h e vefe lakaat an drase e pleustr gant tud dedennet, evit bout sioroc'h e vefe gret mat al labour goulnet. Ha der'hel d'ar JAPD epad ur bloaz c'hoazh, evit ma c'helle ar re yaouank dibab etre an daou...

...Mat e vefe kinnig ur goprig, o tiwall na vefe re uhel memestra. Arabat d'an dud ober se evit an gant. Ha marteze lakaat anezho da dremen testoù evit bout sur ez int barrek da gas da benn al labour a c'houlnent.

Eliaz, 16 vloaz

Ma vez rediet ar re yaouank d'ober ar servij sivil, ne zalc'hint ket ur soñj vat anezhañ. Talvoudus e c'hell seurt servij bezañ evit ar re na ouzont ket war besurt studioù pe micher mont. Dre ar servij sivil e c'hellfent tariva ouz meur a vicher ha kaout skiant-prenet a servijer dezho goude, marteze.

Maela, 16 vloaz

Diseñvel-krenn eo mennozh ar servij sivil ouz an hini soudard. Evit egile n'eus soñj nemet a c'houarn ha bezañ prest ken kaz e vefe bresel. Padal, mennozh ar servij sivil a seblant bezañ troet war an darnen soñjal kendervez eget war al hini. Mont e davepred gant an dud diazezet gant ar gevredigezh, pe e refant ampechet, dilator, pe diligez, a zo ur mennozh mat. Met, pa vez bellet edoet, e c'heller en em c'houlnet perak e vefe deomp, ar re yaouank da vont e davepred gant an dud dilezet-mañ ? Daout ha ne vefe ket ar ar stad d'ober war o zro ?

Alexandre, 16 vloaz

Domol eo e vefe reiñ lakaat e plas ur servij sivil evit ma klaske an dud en em sikour.

Eise, 16 vloaz



Felix Carioù, 14 vloaz

Teir zro vihan ha mont a va kuit...

Klevet ganti trouz pazioù he mamm en trapas, e hastas Marion da serñ trefenn he burev. Aze eo e kuzhe skouerenn he c'hazenn, "Kheops da gazetenn nevez", e oa o paouez resev tri devezh abretoc'h. Aze, dreist-holl, e kuzhe ar gadjet profet gant niverenn gentañ Kheops. Dont a reas he mamm er gumb, hep skeiñ ouz an nor, evel boas.
- Gour'hemennet em eus ar skinwel, a laras-hi war un ton mekanik. Ha war c'hoazh ez aimp da ger'hat da gi. Dal setu da arc'hant chakod. Pemp kant euro, mont a raio?
- Ha Marion da ziskour ez ez dezhi. 'Benn ar fin ne oa nemet ar pezh he doa goulnet. Lakaat a reas he mamm ar bilhedoù war an doal hag ez eas kuit hep ur ger.
Digredus e oa. Efedus e oa gadjet Kheops. Betez re.

Da dreizek vloaz e oa Marion un skoliadez didu-builh, sperekek a-walc'h hep bezañ donezet-dreist, kaoutik a-walc'h hep bezañ hoalus, anavezet a-walc'h hep bezañ brudet...

Ur plac'h normal, re normal. Ur plac'h evel ma 'z eus kalz outo hag a vez dizajet karkant hag ast kuit, ur plac'h e c'hell bezañ annezet un trimidiz a-kichen un den ha chom dianev d'an dense. Ur plac'h evel-se e oa Marion a-raok ma kroges da vezan dedennet-brag gant istor bro-Ejipt. Goulenn a reas digant he mamm kummonañ anezhi d'ur gazetenn war ar faroned, ar pezh a reas he mamm karkant, a-benn tuogrekaat Marion evit he notennoù disparg istar.

Pell a oa bet Marion a c'hortoz niverenn gentañ he c'hazennet rak Kheops a oa ur gazetenn eus ar re siriuzañ hag a oa o tent war-eeun eus bro-Ejipt e-lec'h ma veze treet e meur a yezh diseñvel a-raok bezañ kaset er bed a-bezh. O resev ar gazetenn he devoe Marion ar souezh da zizoleañ, stag out, ur gadjet hag a servije, hervez ar gazetenn, d'ur faroned da lakaat al lezennoù da vezan doujet ha da lakaat an holl da sentiñ ouz o c'hoantou.

Tappel gant he mamm, da c'houlnet diganti :
- Mammig?
- Ya, petra 'zo?
- Ha tu vije din da gaout ur skinwel?
- Ya, evel-just, a respontes he mamm hep ur sell out.

Ha Marion, sebezet bras, da gander'hel :
- Hag ur c'hi?

- A dra sur.
Ha soderet dirak efedusted ar benveg e kendalc'has war un ton asur :
- Chom an bje ivez muic'h a arc'hant godell !
- Pegement a yole doac'h?
- Heu...500 euro, a respontas Marion, distizius obalamour d'ar "c'hwil" bet gret dezhi gant he mamm.

- Ha petra c'hoazh, priñsazig? C'hoant ho pije ivez ur marc'h pe ur c'hastellig pe c'hoazh ur poull-neviat ? Met Marion, ne ya ket mat da benn pe petra ?! Gouzout a rez mat n'omp ket pinvidik. A-du e vefe da breñañ traoù ma paouz an hanter ar priz... Met ur c'hi n'az pa ket !!! Ha ma peus c'hoant e vefe kresket da arc'hant godell e vo ret dit strivañ muic'h ar skoll ha sikour muic'h ar ger. Hag aot e oa Marion kuit d'he c'hamb, digalona-kaet ha disarc'hennet.

Tri devezh goude, e vezas Marion ur seurt mekanikerezh war ar gadjet. Paezani a reas en ul lec'h bennak hag e tispligje neuze ar gadjet e ziskour hag an em lakaas da nijal tro-dro dezhi en ur froustal. Goude bezañ bet gret teir zro vihan e chomas a-sav en he darn debou hag e lakaas tri merkig e stumm tri lerajig e vezan gerioù-stur ar faroned : galleud, diblag, ha furnez (an hini diwezhañ e vezan hanter ziwerc'h). Goude e kaezhas ar gadjet war an doal, divuhez, dinerzh ha di'c'halloud. An devezh war-lerc'h e oa an tele, ar c'hi hag an arc'hant en he c'hamb.

Mont a reo mat an traoù betek ma vezas he zad e oa un dra bennak a-dreuz. P'edant o koadonik e lakaas ar goaz war ar pezh a drubuilhe anezhañ :

- Petra 'ra ur skinwel e kamb Marion? N'eo ket bet roet din da c'houzout! Ne c'hellan ket asantit e vefe gret tro pe dra hep va aotre.
- Me, kennebet, ne gomprenn ket, a lavaras he mamm. Dec'h e oan un tammig gwan hag on'h em roet da gousket... Pa 'z an dihanet e oa un tele hag ur c'hi e kamb Marion. Ne...
- Ur c'hi ?! Ema an tad. Kant gwech 'm eus lavaret 'n em eus ket c'hoant a aneval em zi !
- Henri, paouz da huchal 'ta !
- Huchal a rin kement ha 'm eus c'hoant. Ha perak e vank din 500 euro en va doug-mouez ? Ur burzh adarre? Ha perak emañ dres er memes samad war armel Marion? C'hoant am befe respontou d'an taolou-hudse!

Mat e chomas Marion dirak kement a damalloù. Ober a reas evel ma reo atav pa veze he zad a huchal warni : soñjal kreñv en he fenn : "Serñ ha peg ha chomit a-sav ! N'em eus ket c'hoant gwelket ac'hanoc'h ken ! N'emoc'h amañ nemet evit

mirout ouz-hin d'ober ar pezh a blij din ha da rediañ ac'hanon d'ober ar pezh a zupij din ! Ne ouztr nemet huchal ha gouarnañ ! WAN EUS KET C'HOANT GWELET AC'HANOC'H KEN !"

Digeriñ a reas Marion ha doaliged hag e taolas ur sell tro-war-dro. E-lec'h ma oa annezet he zad ne chome neuze. Steuziet a ont. Skoat-nik e voe-hi. Ne oa ket ar pezh he doa c'hoant. Lavaret ha doa se dindan heit ar fuler. Buon a palligomaz d'ur pellis hag e c'houlnenas diganto dent buon, hep displegan muic'h. Ur arzo "patred Mari Robin" a kontas dezho ar pezh a oa c'hoarvezet. O gwelket anezhi ken strafuilhet e kaezant anezhi da ospital ar re glañv o spard.

Ur wech du-hant e voe goulnennet gant mareod a dud a seblante holl kaout truez out. Goude ur prant-d e voe ast skitiz ken na huchas :

- Laokit ac'hanon frankil, LAOSKIT ACHANON VANAN!

Hag e steuzias an holl. Mont a reas Marion er-maez eus he c'hamb hag e sellas en trapas. Ne oa den. Pennfalllet e oa. Petra he doa gret c'hoazh ?! Kregiñ a reas da redek. Diskenn a reas gant an diri hep kajan gant den ebet. Deredek a reas er strada, pennfalllet. Er gerdenn ne oa nemet trouz an evel o yudal er stradaou goull. Ha goude bezañ redet e-pad un amzer divuzul e kaezhas, e-kreiz an hent en ur bed diboblet, hag en em ras da gousket, keuz ganti eus an droug he doa gret.

- Marion? Marion?

- Hei? Heu...ya. Dihunet e voe gant mouezh gras he c'helenner istar, e-kreiz ur gentel epijologezh.

- Gwenn-kann out! Gwelloc'h dit distreñ d'ur ger?

- Ya, gwelloc'h e vo.

Ur wech erret en he zi e pokas d'he mamm evel ma n'he doa ket gwelket anezhi aboue pell amzer.

- Erro eo da gazetenn, a lavaras hi, souezhet gant kement a seveded.

Mont a reas Marion deuet he c'hamb. Digeriñ a reas an nor hag, hep a tispligje, e taolas er boube-lenn ar gazetenn hag ar c'hwil sakr profet d'he heul.




CHOARIOUSUPERKOULDREISTMEGABEUZ

EMGANN WAR VOR (3)

Skedennaet eo ar mor gant ar gael 'zo amañ e-kichen. Dek vag a rankez lec'hiañ er gael-se hep ma vefent o touchañ an eil re ouzh ar re all. Ar sifroù a bep tu d'ar gael a ro da c'houzout pet tamm bag a vo kavet war ul linenn pe ur golonenn.

un ali fur :
Lak un tired e-lec'h ma'z eo dibosupl lakaat bigi evel m'hon eus graet evit rein sikour.



Gael ar Sifroù

Pa gejr ur golonenn gant ul linenn e c'hellez sammañ ar sifroù 'zo war an div vandenn ruz. N'eo ket ken aes hag e seblant bezañ : sifroù 'zo az peus da gavout !



+	3	7	2	9
7		11		
4			11	
8		6		3
	11		7	
1		16		
		9	2	
	10			

AL LOGOGRIF

Kinniget gant Joel Donnarzh

1	2	3	4	5	6	7
6	3	7	5	6	7	
1	2	6	3	4		
4	3	4	5			
2	7	5				
2	3					
7						

deskiñ a ra
muzulier amzer

heuliad

plijadur

niver

moaien

ur penn ha daou bav

Leugnit ar gael o lakaat lizherennoù e plas ar sifroù (Dalc'hmat ar memes lizherenn evit sifr-mañ-sifr, anat.)

CHARADENN

Kinniget gant G. Delalande

- labous du
- fall pe mat.
- rouz-du.

Ur c'hoari evit ar vugale eo an hollad.

Petra eo ?

Wil ar c'hwil



AR MILENDAL

O redek warlerc'h ar c'hazh-koad emañ al louarn hag ar bleiz. Deuet eo-eñ a-benn da dec'hout kuit dre ar milendal.


Piv a bako anezhañ o c'houzout ne c'hell ar bleiz hag al louarn mont nemet war ar c'hazennoù ez eus tu rannañ o sifr dre 4, ha diskenn a-blaen pe a-sonn nemetken ?

4	7	14	26	64	8	24	36	4
16	36	15	33	52	62	14	70	18
42	56	11	14	44	32	40	32	22
71	12	18	50	30	16	23	28	42
82	60	20	8	82	24	46	8	53
11	22	6	29	37	21	72	24	30
23	45	75	30		56	28	19	22


AR CHADRANAS

Kavout a ri ur c'hod graet gant sifroù mui al lizherennoù A ha B. A a ro da c'houzout pet lizherenn a zo lec'hiet mat er c'hod. B, an niver a sifroù mat a vez kavet er c'hod ha n'int ket lec'hiet mat. Klask ar c'hod reizh evit pep kadrana.


1	A	B
145	0	0
431	1	0
653	1	1
248	1	0



2	A	B
256	0	2
524	1	1
811	0	1
583	2	0




AN ALUMETEZENNOU DAONET



Tenn 3 alumetezenn a-benn kaout 3 zri-c'horn nemetken.


GNASTELL AR ROUËNED

Pet metrad fiseleñn zo bet ezhomm da fardañ ar pakad-mañ ?
DIWALL : N'eus skoulm ebet ganti !




AR CHARREZADUR RONTIK

Penaos rannañ ar c'harrez-mañ etre 4 lodenn, gant 3 euenenn nemetken, a-benn kaout ar 4 stumm disheñvel e-barzh pep lodenn ?



AR BOMBEZENNOU

Laka 8 bombezen er gael. Difennet eo kaout ouzhpenn unan e-barzh pep linenn a-dreuz, a-serzh, a-sonn.



AR GAEL GERIOU-MESKETDIAES BOMINADI




AN DIL-MAD

N N N E G A O K S J N N E P U H C S B K
 K N P O R O O E A N L G K T N T P S O A
 H A E O Z U D K N L O O A A O A U A N R
 K L G D G E E E E O T T O R D M R L E O
 E N I O A D L T L L S L O R F O F E D N
 A A U A E I N E A L G O I K T U L E O A
 A L S N M A W P N K A L A A T C U R U L
 B C N H M U P G E N H J N H N S D O R
 M R K I L I R K A E N I M R C O L A E T
 L E I O I B V M N I E L Z K A U O A R U
 T L B K R O A N P T H E O U L E E R H O
 A Z E A O N O R A R E T E E V R N I L C
 I T G B E L A B R G U E S E R R P R I M
 W E A G A K O R I E Z N A D U M R E B F
 Z E Z I S K N U R K Z N G O U R I Z L E
 B R O Z H U S A O N I A D A Z M S A Z Z
 S T A M M E N N C E R N L E Y I N T E E
 S K E R B G O T H N S K I B R E V T O L
 A S A V E Z E B E R E I Z H L E O I I L
 Z E L W A R Z U D A R M E L N B B E H Z

- AKRILIK
- ANGORA
- ANORAK
- BERED
- BERLAUDA
- BIKINI
- BLAZER
- BONED
- BOTEZ
- BRAEGZ
- BRIKOLOU
- BROZH
- CHAL
- CHAOSON
- CHUPENN
- FEUR
- FLANELL
- FRAG
- GLOAN
- GODELL
- GOURIZ
- GWIADENN
- HEUZ
- HIVIZ
- JAKEDENN
- JILETENN
- KABELL
- KAP
- KOTONS
- KOUIGOUL
- LAS
- LIN
- LOER
- MAILH
- MANEG
- MANTELL
- MOUCHOUER
- NOZELENN
- PALTOK
- ROCHED
- SARO
- SERRPRIM
- SKARPIN
- SKERB
- SPADRILENN
- STAMMENN
- STOL
- TOG

AR FRAZENN GUZH

RESPONTOU AR CHOAZIOU PAZE DREISTEN NIV 36



P.10 - EMGANN WAR VOR : P.12 : AN ALLUMETEZENNOU P.12 : PENP HAG HANTER_KANT
 P.10 - AN TAMMOU A VANK (2,3,7) - AL LOGOGRIF : (1,S), (2,A), (3,O), (4,Z), (5,N), (6,E), (7,G) - CHARADENN : 1.harpañ, 2.kad, 3.segal, 4.lennoù (ar pakad segalennoù) P.12 : PROFOU NEDELEG : (glas =8, gwer =4, melen =1, mouk =2, roz =5, ruz =6) - P.13 : KLASK MONT KUIT (mont er-maez niv. 27) - SONIADOU HENVEL : abeGUS, ameZEG, tinTER, akeTUS, alaNAD, bas TAN

AR GOULENN DROCH-MIK??

Pe anv eo ar c'hazh a zañs gant e barez ?

Respont : Abaz !
rak e' hezh a-barzh.



BEVET E BREZHONEG

BREIZH-BROTHERS

Stemma kontit deomp un tamm petra eo (bet) istor ar Breizh Brothers ?

Savet eo bet ar Breizh Brothers c'hwec'h bloaz 'zo e 1999 gant ur strollad mignoned hag o doa c'hoant kaout plijadur o seniñ er festoù-noz. D'ar mare-se e oamp holl el lise.

Adstummet eo bet ar strollad meur a wech goude-se dre ma oa ar studioù pouezusoc'h evit ar blijadur evit echuiñ gant ar stumm a glever bremañ : Annie Jezequel gant an taboulinoù, Fabrice Beaumin o seniñ gitar ha binioù, Tugdual Huertas an talabarder, ma breur Tangi Ropars ouzh an akordeoñs, Yann Tanguy ouzh ar gitar-boud hag ar gorrbed ha me gant ma violoñs.

Met ur wech an amzer e-pad ar vakañsoù e c'heller gwelet ar re « gozh » ganeomp war al leurenn p'emañt er er vro : Erwan Lofficial ouzh ar fleut a-dreuz, Corentin Pronost hag e dreujenn-gaol ha Manu Pion gant e c'hitar.

Gant peseurt sonerezh eo levezonet izili ar strollad ?

Levezonet omp gant meur a doare sonerezh : jazz (dreist-holl Yann), sonioù eus ar reter hag iyez gant ar sonerezhioù eus ar broioù

latin (salsa, bossa ...hag all...) hag evel-just gant sonerezh hengounel Breizh. Petra eo « merk » sonerezh ho strollad ?

N'on n'eus ket a « verk » sonerezh ispisial met klask a reomp krouiñ ur sonerezh plijus da selaou hag aes da zansal. Evidomp eo kaout ha reiñ plijadur d'an danserien da gentañ toud.

Petra eo an taol kaerañ ho peus graet abaoe ez eus eus ar strollad ?

D'am soñj n'ez eus ket nemet un taol kaerañ met meur a hini, da lâret eo, pa'z omp aet da skouer da b-Portugal evit ur festival hengounel eo bet berr (un dibenn-sizhun hepken) met dreist. Deuet e oamp a-benn da zeskiñ un nebeud dañsoù d'ar Bortugaliz. N'eus ket pell'zo e-pad ar vakañsoù hon eus sonet e Lanniliz. Ken mennet e oa an danserien gant hor sonerezh m'o deus goulennet diganeomp adtre-men war al leurenn. Forzh penaos dre vras e pep fest-noz hon eus plijadur.

Petra a blij deoc'h ar muiañ c'hoari ?

Bez hon eus un heuliad fisel hag a blij kalz din, dre ma'z eo ma dañs kaerañ. Nebeutoc'h a festoù-noz a zo er mare-mañ. Perak 'ta ?

N'hon n'eus ket nebeutoc'h a zeiziaden met lakaat a ra un tammig amzer da adkregiñ dre m'hon eus kemeret ur miz vakañsoù e-pad an hañv. Dre vras ne glaskomp ket deiziadoù met an danserien hag a gav plijus hor sonerezh hag o defe c'hoant kaout ac'hanomp evit ur fest-noz, a zeu da welet ac'hanomp o seniñ.

Petra a rank ober unan yaouank a fell dezhañ c'hoari ur wech bennak en ur strollad ?

Evit c'hoari en ur strollad eo dav kaout c'hoant labourat gant sonerien all ha ret eo kemer amzer evit pleustriñ ha sevel tonioù. Ma vez savet ur strollad gant mignoned mennet hag a en em welet alies e c'hell mont buan.

Peseurt raktresoù ho peus evit ar mizioù/bloavezhioù da zont ?

Aet omp da seniñ e-kichen Bruxelles e bro Velgia e miz Du ha mod all hon eus ur raktres sevel ur CD (met ur raktres e chom c'hoazh dre ma n'hon n'eus ket trawalc'h amzer evit enrollañ).

Gant peseurt soner/strollad e plijfe deoc'h en em gavout war ul leurenn ?

Un huñvre eo dre ma n'ez eus ket deus outo ken met c'hoant hor befe bet en em gavout war al leurenn gant Skeduz pe Ar Re Yaouank.

Hag un tammig muioc'h perso, bremañ : petra a zegas deoc'h ar sonerezh ?

Ar sonerezh (dre vras ket dre ret sonerezh Breizh) evidon a zo un doare da reiñ plijadur d'an dud ha lakaat anezho da huñvreal un tammig. Kalz plijadur am eus pa implijan ma violoñs.

Piv eo ho haroz war an dachenn-se ?

N'em eus ket unan hepken dre ma'z eus reoù hag a zo barrek war ar sonerezh tzigan, reoù all war ar sonerezh klasel hag evel just lod all war sonerezh breizh.

Petra eo an tamm kentañ ho peus desket/c'hoariet war ul leurenn ?

An tamm kentañ am eus desket a oa « Twinkle twinkle little star » (pa'm boa 5 bloaz) e mod sonerezh klasel met an hini kentañ war ul leurenn a oa un ton gavotenn.

Petra emaoc'h o soñj ober c'hoazh war dachenn ar seniñ ?

Er mare-mañ emaoñ oc'h addeskiñ ar sonerezh klasel evit kelenn ar violoñs goude-se (sonerezh klasel ha Breizh) ha diwezhatoc'h e teskin doareoù sonerezh all : country, jazz, tzigan....

Ret eo gouzout eo ar sonerien gwellañ (n'eus forzh peseurt hini) ar re hag a anzav o deus atav un dra bennak da zeskiñ.



Breizh brothers, berr-ha-berr : <http://breizhbrothers.neuf.fr/>
Deiziadoù da zont: 21/01/06 e Landerne - 28/01/06 e Gwignann - 11/02/06 e Sizun - 11/03/06 e Plouzane - 13/05/06 e Gwipavaz - 2/09/06 e Gwitalmeze - 7/10/06 e Milizag - Darempredoù : nafetsky@yahoo.fr

Dauet e vele Marche g al liorzhou betek Bizu da glask reih e stumm orin da Fentog, roua ar Gorriganed.





TRI DEVEZH MA TEK NOZIEZH
ZO AET E-BIHOÙ A-BENN
D'AOÙ VIKIT E VO RE
ZIVEZHAT EVIT MARCHEC
AL LIORZHOÙ.



HANTER-DROBUAN
AN HOLL DA GER-VIZU!



KET!



HANTER-DRO C'HWI
HA ME, NA N'EO
KET C'HWI NEPEN



**KEEET!
BEULKEED!**



DEUET INT?
A-BENN?

N'OUZER KET
C'HOAZH.

FARZ DA LEIN,
FARZ DA GOAN FARZ DA VIKEN,
KOLISTAN 'RAY KER D'HO LER,
PE N'EO KET
KARNABLEM MEUR MA ANV!

TROIOÙ-KAER AR RE TUMADOR
- POAZHAN RAKURZHIET -



DONT A REZ DA BOURMEN ?

A BENN LIN ELJUR, MARTEZE,
AMZER DIN OBER TAN
DINDAN AR SOUBENN.



**GORTOZ !
LIR SONJ 'M
ELIS !**



IJINET 'M ELIS
AR POAZHAN
RAKURZHIET.
LAKAAT A RAN LIN
TAMM GWERENN
AZE WAR AR
BRICHINDOÙL.



A BENN LIN ELJUR E PARO AN HEOL
EELIN WAR AR WERENN HAG E
LOCHO AN TAN E LINAN.



MET PIV EN DELIS LEZET AN
TAMM GWERENN DA STRANIL
DANJERUS EO !



**SETU !
GANT AL LASTEZ !**



DIV ELUR GOLE.
A... N'EN DELIS
KET KROGET !


O ! BSKOAZH !
PELL 'ZO 'N DIJE
RANKET BEZAN PREST !



MET PETRA 'POA
RAKTRESET, 'VIT GWIR ?
POAZHAN AR SOUBENN PE DEVIN
AL LASTEZ ?

ELL

Ma 'z out etre 4 ha 10 vloaz, wa plij dit an 3 haroz, deus 'ta e klub TUMADOR. Bez' po profoù ha souezhadennoù.
Aes-kemañ eo, an holl ditouroù evit emezellañ a gavi war beostoù ar produioù TUMADOR hag a zo e-qwerzh e-barzh
stalioù





HA GELLOUT A REZ DONT UR VUNUTENN, RHESUS ?



EZHOMM 'T EUS OUZH UN DRA BENNAK ?



HA GELLOUT A REZ DER'HEL UNAN EUS AN DIV NEUDENN-MAN, MAR PLIJ ?



MAT EO, UNAN 'M EUS TAPET !



HA NE RA NETRA DIT ?



PETRA 'M EUS D'OVER GANTI BREM ?



NEUZE E TLE BEZAN AN HINI ALL ARABAT DIT TOUCH OUTI...



220 VOLT A ZO GANTI !



A, N'EO KET BRAY ... A, N'EO KET BRAY ...



BEZAN AN TAD NEDELEO...



SABER NA CHAPEZ, LONDER BREZA PE GERVEL A RAB AN POLES !

RO PEOC'H DEOHPI !



KAS 'H EUS OUZH NEDELEO ! HAO OUZHOC'H IVEZ !!!



Hanneg... An Tad Nedeleo n'ez e ket eom. Na kinn eo, 'gred die ?



Er bloz-mañ eo ar porzhier eo en des rannet ren ar profos. Re en dije erret, ar wech ouzhpenn...



HET AN TAD NEDELEO NE EV KET !

OOZOUT A RAB...



TADIO NEDELEO... TADIO NEDELEO...



LOENED! MET PENAOS TA?

PELEC'N EO TREMET HOLL BUGALE AR GER-MAN?

ooo ! AR FURLUKIM / NEBEUTOC'N A DOULOMPI GANT DA GORN-TROUZ!

PW? ME?

E SAL AR GOUELIOÙ, E PENN ALL AR STRAED, EMAN AN HOLL VUGALE, MA TELL DEOC'N GOUZOUT

DAM YA. GANT DA DRUILHOÙ E VEFE LARET ROBIN AR C'HOADOÙ...

GORRIGED SOT NA DIVERGONT! TREC'N EO o SOMERZIN WAR C'HOARI PRIMIK HA SKANIK MA FLEUT!!

DISTREIN A RIN C'HOAZH, WAR MA LE A C'HOARIER FLEUT

NA DIFESON OC'N GMSKET. Ho PET AR VADELEZH DA GUITAAT AL LEC'N-MAN DIOUZHTU-DAK. UN NOZVEZH PREVEZ EO, AOTROU TRUILHOÙ.

SOMERED BRESTADURNEK GANT ? GORRIG AR PEPPER'S LONELY HEARTS CLUB BAND

Aet eo Gabrielle da breizhañ Kadoudal war adoù Bro Caux. Faetel eo bet ar vag gant unan eus he martoloded.



AN HOLL DUJ EN O FOBT!

HA ARHOÙ ?!

EH TE ! PETRA A ITRONEZ TRO-DRO D'AM C'HARTENNOÙ ?

KOHZ ! EVIT PW E LABOUREZ ?!

'HON O VONT DA GERI' HAT ANEZH O EN LOELL!

HUGUES, KEHER AR REN E HARG!

LAGNY ...

LAGNY ? ... HOC PARHANTOUR ?!

PAET EN DELS AC'HANON EVIT HA VEFEC'N DALET REIN A RAME AR C'HANT EVIT HA RE VIMAN NEUZE EN EUS FREUZET AR C'HALEFETRE.

LAKAT-SE DIN EN TOULL!

ADKEHER A RAN AN TRAOÙ E KONT!

EN, DRES ...



HUGUES
DEUIT TOST
OUTAN !

BOUZHIT START !

KARGIT A
VINDRAILH !

TAN !

BLOOUM

TRALWA' H A
AMZER GOLLET.
ADKHE ROHP
PENN HON HENT.
DAV VO PLANTA
BARZH.

KAS A RE AR VAG LIN
NEUREUD LEVIDO
WAR-ZU AN NORZH.

A-STROLLADOU-
1600 GIZ ED
BET LARET.

DAOU ZEN GANIN DA
VONT WAR AN LHEL.

AR RE ALL GANT HUGUES
A-DRENV AR REIER.

TROUZ EBET
KEN ADALEK
BREHAN.

AR PRIJES NE ZEUG
KET KEN ? DISTROHP.

DAONET!
TREITOURET
OMP BET !

PAOLIEZIT !
KELC' NIET
OC'H !!!

UR VAQUEZ ???



YA, HA
GOLDE ?

ALE, BERRIT
ANEZHO PRIM !

PELLOC'H
TE !!

LAOSKIT ANEZHAN DIN !

KADOU DAL !!!

TEC'HOUT
A REZ DIRAK
UR VADEUZ ?

Da vezañ kendalc'het...



DIWALL...
BANN KRENN !

HOP ! HOP ! HOP

SHTUNK

C'HA ! C'HA ! C'HA !

FELZ ! Ne beg ket !
Setu n eo ket mat da zehriñ...

00000!!!!

Dev dezhañ pegañ. Gwelit 'm eus
se e KOSMOPOLEMPENN...

KAERAT DOUBENN
D'AN NEBEOTAN !!!

AR CHASE (EIL LOENN) DETT A MORVAN



embannet gant :
KEIT VIMP BEV
 22, grand rue
 29520 LAZ
 Pgz : 02.98.26.87.12
 Plr : 02.98.26.80.35

keit-vimp-bev@wanadoo.fr
 Moullet gant :
QUESTELIO
 505 st. Julien de la Graviere
 BP 30708 BREST cedex 02

Finer ar gazetenn
Yann-Fanch JACQ

Keruzhiañ / Maktolenn
 Tresañ ar c'hoarioù :
Owen POHO
 owen.kyb@wanadoo.fr

Tresadenn ar golo :
JC. BALAN

Skoazellerien :
 Gwen Delalande
 Paskal ar Marc'heg
 Niv. CPPAP : 1005 G 840 75




Istorioù farsus
Yann BIJER

Butun an den skragn

Ur wech e oa daou gamalad, kichen-ha-kichen, o c'hortoz an tren war ar c'hae. Unan anezho a sache moked deus e gorn-butun, gwashoc'h evit marc'h-du an tren. A-benn dek munutenn, e tenn egile e gorn-butun hag e voest alumetez deus e chakod ivez hag e lavar.
 " Sed 'ta, goullo eo ma boest alumetez. N'eus ket ur voest all ganit?"
 " Dal, un alumetezenn neuze," a lavar e gamalad.
 Kemer a ra egile an alumetezenn. Tastournat a ra neuze chakodoù e chupenn en ur lavarout.
 " Bastagn! Chomet eo ma butun war ma lerc'h."
 " Ro din ma alumetezenn en-dro, neuze", a gemenn e gamalad.

TrEsAdEnn Ar MIZ

KASIT dEomp hO trEsAdEnn E liv
 Ar rE wellAn a vO EmbAnnEt



Gwenn, 13 bloaz, Kerneve

DARIUS Gilles SANGLA



